

u. Dottier. & approuwoff au u. l'équa  
L.S.L. 202193 121 116



## CANTIC SPIRITUEL

Var Glac'har eus ar Verc'hes, Voar

Ton, Michel Nobletz.

JESUS ra vezo meulet hac e Vam biniguet,

A zesir a vir galon sicour ar Vretonet,  
Revelet èn e deveus da un den dîn a feiz  
Scriva ur C'hantic nevez da buplia e Breis.

Pa e guelas an den-mâ e voe estioner bras  
He Map etre he divrec'h goude disquen ar  
Groas,

E divrec'h hac a bisaih a voa rusiet gant  
goat,

Ma velas e oll espéranc ur sujet admirabl.

M'em eus quement a druez, emezi ouz  
an oll,

Me gare gallout miret n'en dae den da goll,  
Deut oun d'hoc'h avertissa, m'ho ped, na  
vanquet quet,

Discleria e caran sicour ar bec'herien dallet.

Itron, c'hui so quer caret gant ho Map  
biniguet,

Ha quement a c'houlennot ne viot refuset,

A

**Ha possabl ve e renquer caout ur speret humien ,**

**Da obteni ho requer evit ar bec'herien.**

Me a so quen ordinal evel ma red an dour  
**O c'houlen digant ma Map d'ar bec'hetien  
 recour ,**

Hac o veza respontet , me n'o refusan quet ,  
 Ne allan quet pardoni da nep ne c'hoanta  
 quet.

Var-se eta Chrislenien preparet ho speret  
 Da receo en ho calon ar c'homfou anoncer  
**A c'henou sacr ar Verches gant truez ou-  
 zomp-ni ,**

Biscoas ne glevas Christen quen truezus hac  
 hi.

Va Jesus leun a druez , permetet gant ho  
**Mam ,**

Ma ellin antrepreni e desir gant estlam ,  
 Estranch a bep den abil consideri e voues ,  
 Gallout gouela a galon ha cana assanibles.

Quement den e felaou a bep feurt qualite  
 So crissoc'h evit un Tigr hac evit ul Leon  
 goue ,

Ma na ell dont da vouela pa entento e lenn ,  
 E ell donet da longeal n'en d'è quet guir  
 Christen.

Evit an oll assistantet , Rouanes me ho  
 ped ,

3

Contempli ho clac'har, ma cassaint ar pe-  
c'hel;

Ma servicho ho taoelou da velc'hi hon ene,  
Me zefir a vir galon remission dese

Quement den a regreto e amser tremenec  
Hac a guitaï e viçou en amser da zonet,  
Me assur en devezo remission plenier,  
Henvel ouz ar Vadalen gueichal gant hor  
Salver.

Me garre en guirionez gout ar sujet a-se,  
M'ho poe quement a c'hlac'har e durant ho  
puhe,

Biscoas ne voe Mam er bed quen truezus  
ha c'hui,  
Eus ho pers na veritsoc'h glac'har na mel-  
coni.

Pa anonças Gabriel e touguen ma Doue  
Me recevas ur joa vras em c'horf hac em  
ene;

Mæs ur feunteun a c'hlac'har em c'halon  
a savas,

Queit ha ma chommis er bed, nep amser ne  
cessas.

Pa zi sclerias Simeon etre ar Profedet  
E oa deut ar Map-Unic da redima ar bet,  
Fachet voe ar Jusevien pa glefsont lavaret  
E c'hansen ur C'hrouadur hep goualan ma  
guerc'hder.

M'em eus-èn douguet nao mis etre ma  
 daou goste,  
 Quen trist ha quen glac'haret injuriet gante  
 Gant quement a nec'hamant hac aon eus  
 ma buhe ,  
**Pa ne vet ma c'honduktor Joseph am asista.**  
 Pa dinessas an amser da zonet var ar bed ,  
 Me zesire e c'henel en ur plaç preparet ,  
**Mæs Doue a hermetas a ma viot rentet**  
 Entre e adversourien er Guer a Nazare:h.  
 Da ben un neubeut goude e voan aver-  
 tisset ,  
 Ma quitafen ar c'hontre rac ne vise laser ;  
 Hennes voa an nec'hamant abalamour d'ar  
 Buguel ,  
 Rancout quitat ar c'charter pe e laquat da  
 verval .  
**O Tad leun a drugarez sellit ho crouadur**  
**Hac e Vam quer glac'haret o vont en avan-**  
 tur ,  
**Gant quement a baourentet m'ho ped d'o**  
 asista :  
**Allas ! n'em eus pouvoar nemet gouela**  
 outâ .  
 Pa voan arru en Egypt e songean caout  
 repos ,  
**Mæs en nebeut a amser e chansas direpos ;**  
**Herodes a ordrenas elec'h ma commandé**

5

Ma vise incontinent laſet ar vugale  
Ne gaffer speret humien a alle discleria  
Ar glac'har am possedas pa glevis quememâ  
O tont da gonſideri eo an occaſion  
E laſer ar vugale evit laſa va mignon.  
Meurbet ez on eſtonet o conſideri-le,  
Ma anduras er bed-mâ quement a baourente  
Quement voa er bed - mâ en devoa oll  
crouet,  
Hac a ſent-fe outâ ma vife e ſouet.  
Pa pec'has hon Tad Adam e voamp oll  
ruinet,  
Ma tisplichemp da Zoue en devoa hor  
c'hrouet,  
Ezajemp oll d'an Ifern, den n'en devoa  
repqs,  
Sujet voamp da Lucifer, ferret voa ar  
Barados.

Dre druez ha carantez e ordrenas an Tad  
Da gaç ar Speret-Santel da incarni e Vap,  
Ar poaniou a verite e oll crouadurien  
A zefiras da gouzân herve Doue ha Den.

Pa oa arru an amfer a oa determinet,  
E yeas gant e Disquibyen er Jardin Olivet,  
O veza obdissant da volonte e Dat,  
Elec'h drouc a veritemp e tefir hor mat.

D'ar Guener mintingolo e teuas Ian da  
veler,

Hac èn en noas diviquet casi voe trelatet ,  
 Hac e lavaras , Mari , emàn eo ar glac'har ,  
 Ho Map a so quemeret eguis ur c'hriminal.

Quement ma heulias e velet ez on eat  
 d'ar menez ,

Ma fenis disesperi pa ne allen meravel ,  
 O vont etre daou laëron , ha n'o anavient  
 quet ,

E oat eguis e groc'hen o voa oll dispennet .

Pa voa divisqua e saë e velan e esquern ,  
 Neuse e velis c'huesec o sach'a gant querden  
 Voar e dreit hac e zivrec'h da diout toul-  
 lou ar Groas ,

Sur e verit ar pec'her caout punition vras .

Pa voa gorroet en noas a enep an amfer ,  
 E souffras injuriou bras etre an daou voler ,  
 Te a lavaras beza Roue ar Judeazvet .

Ny es laca Capiten etre ar Briganter

Quent evit ma finissas ne refusas nicun ,  
 Meritou e Bastion d'an oll a voa comun ,  
 E roas deomp da entent ne voa den refuset  
 Digor vezò ar Barados bete fin ar bed .

Nemet eiz ha tri uguent ez eo bet feiz  
 mil bloaz .

Ar Barados ferret o c'hortos quememâ ,  
 En a c'houzan evidomp , dezàn omp obli-  
 ger ,

Nep a gredo d'e Lefen ne vezò quet collet .

Dre verit e Baffion, It'on , en hor preras  
 Ne reservas nep hini, hon dle oll a baeas ,  
 Ha cousgoude pa lennan , e cavan rapportet  
 Pa zeont eus ar bet-mâ cals a dut so daonet.

Quer bras voa e garante e quever e vu-gale ,

Ma permet da bep hini ober e volonte :  
 Ne ellont quet lavaret queit a ma zint ex  
 bed man ,

Me so crouet gant Doue evit suget dezan.

Disquennet , me ho supli , ma Map di-  
 mes ar Groas

Evit ma en ambiaffin aman voar ar glinoat  
 glas :

Ema ar baourente , var an teil eo ganet ,  
 Hac en noaz ez eo maro , hac en noaz en-  
 terret.

Me bed Joseph va mignon , abers Doue  
 an Tad ,

Da ober ut bez nevez evit lacat ma Map ,  
 Pa vezo ressuscitet , a na vurmuro den ,  
 Un all ve ressusciret na ve quet ma Map ve.

Pa voamp ous e anterri , neuse e arrives  
 Ar Jusevien arraget ; hac a epouvantas ;  
 Ma quitas va mignonet gant spont ous o  
 guelet ,

Ha ma chommis ma - unan hep gout pe-  
 lec'h monet .

Va Zat biniguet en En, hac eon a voe  
biscoas

Ur feme en voar ar bed a ur glac'har quer  
bras,

Chetu me abandonet er Menez Calvari,  
An nos a so o tonet, ho pêt truez ouzin.

Autrou-Doue, va Ch'ouer, roet din  
patientet,

Gant ma Map pa oue er Groas me voe  
recommander

Dezàn da veza ma Map ha me da Vam  
dezàn,

Hac ez oun quitaet gantâ ha leset va-unan.

Me n'em eus ho quitaet na birviquen na rin  
Bet oun o pourvea cambr evit ho repui;  
Quemeret patientet, Mari, na ouelet mui,  
Dont a raï da ben tri deiz ho Map d'ho  
consoli.

Ne voa speret quen parfet nac Ælez en  
Envou,

A gare beza er gambr da glevet ar c'havou  
A ra ar Vam a druez gant ar glac'har d'he  
Map,

Criz e ar galon er sonch na defe da tristat.

Me eo an truezusfa a voe biscoas er bet,  
Gant an oll ez oun dispriset, casseer, dise-  
noret,

Eguis un oan egaret etre al leonet,

Pa hon leset gant ma Map, ma Zat va si-  
couret.

Allas ! pelec'h ezin-me pa vezo deut an  
deiz,

Mui a valiç so ouzin evit a garantez ;  
Mar sortian ne velin nemet an tirantet  
A gare va merzeria , va Zat , mar permetet.  
Er plaç-mâ oue Mari o ouela nos ha deis  
Heo na dibri nac efa e spaç eus a dri deis,  
O contempli ar boan a verit ar pec'het ,  
Ha truez ous ar bec'herien en amfer da  
zonet.

Pa ressuscitas ma Map , e teuas prest d'am  
guelet ,  
Ha me goulen digantâ pe en lec'h ez oc'h  
bet ?

O ferri porz an Ifern va Mam eo e teuan ,  
Quement a voa o c'housan am eus lamet a  
boan.

Cals a dut malin a vo va goude var ar  
bed ,

Hac a vo quen efrontet , va mam , da lavaret  
Pa n'en deus nemet ur plaç , e ret e vemp  
salvet .

Hac a souille ar Barados , va Mam , gant  
o fec'het.

Va Salver , me ho supli , ha n'am dile-  
set quer ,

Recommandet va ene d'ho Tad Crouer ar  
bet ,

Ho pezet coun ac'hanon er Baradoza gloar ,  
Ma vin caret en Evou pa n'en don en douar.

Tri bloas varn-uguent goude ez eo bet en  
buez ,

Da gouragi an Ebrestel da publica at Feis ,  
Quement graçou na vertus a zisquen en  
douar ,

A dremen dre e daouarn dre vertus e gla-  
c'har .

A het tri bloas varn-uguent bemdez e ze  
Mari

Da saludi Croas he Map e Menez Calvari ,  
Biscoas n'en em gontantas o veza deiz ha  
nos

O requeti ma yafe an oll d'ar Barados .

Pa gonsideras he Map n'en em gontante  
quet

Da requet digantâ quitat poaniou ar bet ,  
E tigassas Gabriel en e gambr eus an Ee ,  
Da anonci da Vari pe da heur e varvse

Pa ho saludis quenta , Mari , me a songe  
E vise contantamant ha joaou ho pise ,

Nemet glac'har ha poaniou goudeves n'eus  
bet ,

Ha c'hui ve oboissant da zilefel ar bed ?

Evit dilesel ar bet me ne ran quet a gas ,

O quitat ar gristenien em eus melconi bras ,  
 Chom da ouela evito a garen er bed man ,  
 N'en daë den d'an Ifern evit anduri poan.

En queit a ma desire Mari chom var ar  
 bet ,

Ho Map ho car quer parfet a n'o refuso quer ,  
 Daouzec bloas ha tri-uguent aba zoc'h er  
 bet ,

Poent eo quitat ar glac'har ha beza con-  
 solet.

Va Map , me a zefire vise an Ebefstel  
 Presant ouz ma assista pa rents en va buez ,  
 Va guervel a rent o Mam hac o soulagea-  
 mant ,

Ma lesin dezo va c'horf evit va destamant.

An Ebefstel egaret a bep contre a-bell ,  
 A voue souden assamblet voar ur goabren  
 Ha rentet en un instant er gambr gant mi-  
 racl bras ,

Da zonet d'e assista , reservert Sant Thomas.

Thomas a oue en Egypt a oue ive rentet ,  
 Ne oar quet pe e fæçon er Jardin Olivet ,  
 Evit gallout rei rapoit ar Myster admirabl  
 Er plaç ma ouelas e Væstr o chouesi dour  
 ha goat.

Dre un inspiration e risquennas timat  
 Eus ar Jardin Olivet e Traouyen Josaphat ,  
 Ma cayas an Ebefstel hac hi oll glac'haret ,

O vouela d'o Mam Mari e devoa o c'huitet.

Disquezit din , va Breudeur , ar bez ma voa Mari,

Rac mie a gred assuret bremâ n'emedi mui,  
M'em eus-hi anavezet o vont corf hac ene  
E compagnunez he Map , ar Sænt hac an  
Ælez.

Te , eme Per da Thomas , a so incredulus ,  
Na gredas quet e vise ressusciter JESUS ,  
Fa nevet ma e laquas da douch e bemp  
Gouli ,

Ha bremâ ne gredes quet enia er bez Mari ?  
Me ho supli perinetet ma zigorin ar bez ;  
A neuse me taiï deoc'h guelet ar virionez ,  
Pa voa digoret ar bez ne voa netra enna ,  
Nemet al lincel a voa lequet d'e liana.

Nemet Doue ne alle discleria ar glac'har  
Quement e voent estonet ma couesent d'an  
douar ,  
Ne allent quet caout couraich da sevel  
ahane ,  
Quen na visent consolet gant un Æl eus an  
Eê.

Pa voar Varn general va c'halon a ro din  
N'em eus quet bet voar ar bet quement a  
velconi ,

Evel am bezo neuse pa glevin ar re daunet  
 O goulen ouzin sicour ha me ne allin quet.

Me a gred pa goulennot e caffo agreabl,  
 Ne deus netra impossibl da Jesus-Christ ho  
 Map ,

N'en deo quet bras mister deoc'h caout se  
 digantâ ,

Evel ober an douar hac an Eê a netra.

Me a requet ous ma Map rei pardon  
 dese ,

Mæs ne vezò nemedon o presec evite :  
 An oll Predicatoret , memes an Ebefstel  
 A vezò sur em enep Advocadet contrel.

Va Map , gouela a reont ha n'o c'hon-  
 solet quet ,

Me a vouelo evite ma viont consolet ,  
 Ma n'och eus truez oute , seller ho Mam  
 Mari

So dirac ho Majeste quer glac'haret hac hi.

Ma Mam , n'en deo quet me so quiriec  
 d'ho glac'har ,

N'o devoa quet meritet pa voant var an  
 douar ;

Braffloc'h mister e caffen rei pardon dese ,  
 Evit pa grouis ar Mor , an Douar hac an  
 Eê .

Birviquen oc'h nec'hamant ne allac'h ma  
 miret ,

Mar disquennot d'an Ifern na mar bezont  
daonet ,

Abalamour d'an divron en deveus ho læser ,  
Ho pezet truez oute , n'o c'hondaonet - hi  
quet.

Me garre em be ar gallout da zisquez  
ma c'halon ,

Da requeti digueneoc'h dezo remission ,  
Pa na servich va daelou , va divron ha va  
læs ,

Va Map , bras eo ho coler refus ar pec'her  
quæs.

Va Map , it d'ho Parados gant ar re so  
salvet ,

Ha va leset er plaç-ma evit gouela bepret ;  
Gant an douar am daoulagat me o guelc'ho  
quen net ,

Dign da vont d'ar Barados , n'o c'hondau-  
net-y quet

Ne allent-y quet beza net ha quitat o fe-  
chet ,

C'hui oar ar viriones ar pez am eus souffret ,  
N'em eus netra espernet d'o renta evit  
poan ,

Mepriset o deus ma Goat , ret e dezo gou-  
zan .

Hennez vezo an estlam pa vezo deut an  
deiz ,

Quement a vezo prelant a garent ne vent  
quet,  
O clevet ar Map, ar Vam n'en emi accor-  
dont quet,  
O songeal en re daunet prest da veza bar-  
net.

JESUS, ha c'hui a gare e couestemp a  
enep,

Ny hor boa gret hon never etre voam voar  
ar bed,

Ny a gare assuret ne visemp quet crouet,  
Da veza controll d'ho Mam a so quen es-  
tlamer.

MARI, pa eo ordrenet, ez eo ret din  
parlant,

Ny hor boa-y instruet e teuse ar Jugea-  
mant,

Mar de ny a so manquet, ni requet digue-  
neoc'h.

Ha ma vezimp-ni daunet hac hi a yel gue-  
neoc'h.

JESUS, ez omp oll presant, c'hui voar  
ar virionez :

Ny a ziscueze dezo an hent celestiel ;  
Ny requet digueneoc'h, mar d'e ny so  
manquer,

Ha ma vezont-y salvet, ha ny a vo dau-  
net.

Ma Mam , a c'hui gred bremâ , me n'ho  
refusai quet ,  
Me n'em eus quet o c'hrouet evit beza  
daunet ,  
An Diaoul o deus choas et da gonductor  
deze ,  
Chom a raint en lfern entre vezin Doue.  
Ne ven quet ur Barner just mar laman  
digante  
Quement o devoa choas et pa voant en o  
buhe ,  
Me varvas en o presanç da baea o rançon ,  
Hac a ro bremâ deze va malediction.  
Songeom era , Christenien , er glac'har  
a Vari ,  
Gant truez ouz hon ene requetomp diganti  
D'en em viret ous pec'het na vezomp quet  
quefret  
D'hor Mam Mari da ouela ous hor guelet  
daonet .  
Itron Vari a Druez , entre m'omp en bu-  
hez ,  
Pedit ar Speret-Santel d'hon inspira bem-  
dez  
Da garet ha da servicha ho Map gant di-  
ligeanç ,  
Hac en hon heur diveza caout hoc'h asif-  
tanç .